

*Memento ar ré varo*

O pezet sonj deuz ho pugale garët,  
A zo en tan gant ho justis kastizet.  
Merket int gant ar feiz ha gant ho karantez,  
En han' ho sakrifis, o pet outho truez!

*Pater*

Doue, hon Tad, dre oll ra viot meulet,  
Ho polontez dre oll ra vezo heuillet;  
Roit d'an dud, bemdez, an tam bara zo ret,  
Ha diouallit hon ene deuz bilim ar pec'het.

*Agnus Dei*

Var ar C'halvar, Jesus, c'hui oc'h euz paet  
Dle ar pec'her, an eneou c'heuz prenet  
Ni ho ped, Oan Doue, o pet truez ouzomp  
Ha roit d'eomp ar peoc'h, skuillit ho kras var-  
[nomp.

*Domine, non sum dignus*

Pegen kaer eo tostad deus an daol zantel!  
Mes, sionaz d'in, penaoz sevel ken huel:  
Rak me zo eur pec'her, re baour eo va ene!  
Mes livirit eur gonz, hag e vezin pare.

*Goude ar Gommunion*

O va Jesus, penaoz c'hellimp-ni diskuez  
Hor c'harantez, 'vit kement a yadelez?  
Ni ro d'eo'h hor c'halon, hor speret hon ene,  
Ni fell d'eomp ho meuli, hed an eternite.


*Bennoz ar beleg aviel diveza*

Araog mont kuit, goude bennoz ar beleg,  
Pardonit d'eomp mar domp bet re lezireg  
Da heulia penn da benn sakrifis an oferen,  
Ha kinniget, c'houi, Mari, da Zoue hor peden.


Enn deiz da zont, bodet en dro d'hor Zalver  
Er Baradoz, ha dizolo ar mister,  
Ni a gano bennoz da Zoue 'n em c'hret den,  
Evit gallout rei d'eomp ar bonheur da viken!

**L. G.**

Imprimatur  
Quimper, le 24 Novembre 1906  
EM. FLEITER,  
V. G.

**KANTIK AN OFEREN***Ar beleg e traon an aoter, hag an Introït*


Stou - et pe - c'her, a - man di - rag an ao - ter,



Di - rag va Mestr, hag heb da - le va bar - ner. Me



deu leun a fl - zianz hag e - vit kaout par - don, da



skei di - rag an oll, e kreiz poull va c'ha - lon.

Diskuezit d'eomp, va Doue, ho trugarez,  
Ha dre ho komz, ni vezo pur à nevez,  
Evit tostad ouzoc'h, sevel gant ar beleg  
Deuz aoter ar C'halvar, trôn ann oll C'halloudeg.

*Kyrie. Gloria in excelsis*

Trindet Santel, ouzomp-ni o pet truez,  
Ha ni gano assamblez gant an elez:  
Gloar da Zoue en env'ha peoc'h var an douar  
Da vugale Doue, peoc'h d'an hini he gar.

*Peden*

Ni zo dister, c'houi a vel hor paourentez,  
Mes evidomp e ped ar zent, an elez.  
Selaouit ho moueziou ha selaouit Jesus,  
Ha dreizhan evidomp bezit trugarezuz.

### Abostol

Klevomp breman, mouez an Testamant kenta,  
Deus 'n Ebestel ar c'hentelliou santella;  
Kreskit, o va Doue, hor feiz en ho lezen,  
'Vit ma vezo tomoc'h hor c'halon er beden.

### Aviel

En aviel e komz Doue he-unan,  
Savit 'n ho sa evit selaou anezhan.  
Bennoz d'eoec'h, va Doue, da veza lavaret  
Ar pezh zo da ober, ar pezh zo difennet.

Kredi a ran komzou an Iliz santel,  
Senti outhi a fell d'in beteg mervel,  
Dreizhi e komz Doue, ha ne 'z eus ket daou hent  
Da gaout ar virionez 'vit mont da vro ar zent.

### Prof. Lavabo



Kin-ni-gomp oll, as-sam-blez gant ar be-leg, Guin ha ba-



ra, ma ga-du-rez pem-de-zieg, E-vit be-za-chen-chet e,



korfgoal hor Zal-ver, da va-ga hon e-ne, na pe-ger bras mis-ter.

Ni ginnig d'eoec'h hor c'halon hag hon ene,  
Var an aoter, da veza chenchet ive.  
Goalc'hit hon eneou, kasit pell ar pec'het,  
'Vit ne vezo ennoamp nemet Doue kavet.

### Orate, fratres

Pedit, breudeur, 'vit ma plijo da Zoue  
Hor sakrifiks, rak hoc'h hini eo ive:  
Ra blijo da Zoue, evit he vrasa gloar,  
Evit mad hon ene hag Iliz an douar.

### Préface

Evit meuli Doue an oll zantelezh  
Savomp hor mouez da heul hini an elez.  
Ne 'z euz netra ker just, rak Hen eo hon Aotrou,  
Ar Mestr var an douar, kerkouzh hag en envou.

### Sanctus

Santel, santel, leveromp teir guech santel  
Eo hon Doue, e bar an env ken huél.  
Var an douar ive, kanomp d'eshan bennoz,  
Pa blij ganthan disken deus gloar ar baradoz.

### Araog ar Gouereou

Pedomp breman, unanomp hor c'halonou  
Gant ar beleg, selaouomp he bedennou:  
Fedi ra 'vit an oll, 'vit ar Pap, an Iliz,  
Evit brassa ezomou ar re zo en ofiz.

### Goude ar Gouereou




A-do-romp oll, e sa-cra-mant an ao-ter, Eun Doue ku-



zet, Je-sus hor mestr, hor Zal-ver. Spe-re-jou evu-ruz, prin-



sed deuz he ba-lez, Gant ka-ran-tez ar-dant, meu-



lit Hen da ja-mez, meu-lit hen da ja-mez.

### Pa 'z eo stouet ar beleg

Digemerit, Elez, divar an aoter,  
An Hosti-zakr ha sakrifik hor Zalver,  
'Vit ha c'hass d'an envou, da baea evidomp,  
Ma kouezo adare, pardon Doue varnoamp.